

KAIEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG - ESKOPTI KEMPER HA LEON

o o o

KAIER XV - Mezeven ha Gouere

o o o

Cahiers non périodiques - Souscription 10,00 f.

C.C.P.: 1738-~~G~~RENNES - Abbé Joseph SEITE - 29 N GUISSENY

Goude maro an Aotrou chalon Per-Yann NEDELEC
oo
ooo

*Gouzoud a rit eo eet an Aotrou NEDELEC da anaoun. Braz ha pouezuz
eo bet al labour e-neus greet o sevel Kaierou ar Brezoneg, hag o ren ar
gelaouenn gand kement a aked hag a ouiziegez.*

*Goulennet 'z eus bet diganeom kenderhel gand e labour, henn ober
a reim, gand doujans evitan, euz or gwella. Goulenn a reom digand ol lennerien
rei deom da anaoud kement a hellfe digas gwellaen er pennadou embannet.*

K. a B.

ooo

DU BRETON, POURQUOI ?

oooooooooooooooooooooooooooo

Des lecteurs s'étonneront de la place donnée ici à l'oeuvre de M. le chanoine NEDELEC dans le domaine particulier de la traduction en langue bretonne des textes bibliques et liturgiques. Tels y verront un geste pieux à la mémoire d'un savant collègue. Tels autres, un os jeté aux "ghettos", aux "communautés-refuges"...

Ils feraient fausse route, car il s'agit bel et bien de l'annonce de la foi aux hommes d'aujourd'hui. Le breton peut-il encore être une langue pour la célébration et, allons plus loin, pour l'évangélisation ?

M. NEDELEC, en raison même de ses attaches et de ses ministères, était sensible avant tout à l'aspect "langue des braves gens" et "héritage culturel". De ce fait, il n'était que d'entendre à ses obsèques les réactions de laïcs et de religieuses à la lecture bretonne de la vision d'Ezéchiel pour le comprendre: les mots de tous les jours donnaient une force "inouïe" au texte sacré, tout en faisant mieux apprécier sa valeur littéraire.

Mais il est d'autres motifs: les appels de certains milieux évolués et leur volonté de bretonniser leur manière de vivre, la demande impatiente de jeunes toujours plus nombreux (étudiants et autres), la cristallisation de tendances diffuses autour de l'Université de Bretagne occidentale, la politisation des revendications économiques et culturelles, les projets de régionalisation... On peut hausser les épaules, encore faudrait-il y aller voir! Et les 500 marcheurs de GALV de Lorient méritent-ils moins de crédit que bien d'autres manifestants ?

Ce qui était impossible hier à cause de l'ostracisme dont était victime la langue bretonne, de la part des "élites" comme de celle des usagers, devient désormais possible. Hier il était difficile aux prêtres les mieux disposés d'aller à contre-courant. Aujourd'hui, la radio et la télévision commencent à parler breton ("Breiz o veva"), des milliers de jeunes et d'étudiants suivent des cours de breton (des centaines au seul collège de Lesneven), les courants socialistes récupèrent le mouvement breton...

o o o

Bien sûr - comme la liturgie en français et la pastorale des réalités humaines collectives - la liturgie bretonne connaît ses sectaires et ses monstres. Mais l'intuition fondamentale est juste: permettre à quiconque de se dire du Christ sans se faire Juif.

Nous laissons aux dépliantés des syndicats d'initiatives telles messes bretonnes de fêtes folkloriques, mais nous marquons d'une pierre blanche celles qui se disent à des dates régulières dans un nombre croissant de paroisses bretonnantes. Nous inscrivons au service d'une cause politique ou culturelle ces messes "penn-da-benn e brezoneg" assénées sans préparation (comme naguère les psaumes en français à des assemblées mêlées, mais nous recevons ces célébrations où la langue bretonne redevient progressivement un moyen d'expression liturgique des chrétiens d'aujourd'hui. Nous nous interrogeons sur certaines messes bretonnes radiodiffusées qui témoignent davantage du passé que du présent, du musée que de la vie, mais déjà le positif l'emporte.

Cette question de la place du breton dans l'Eglise demanderait une étude moins superficielle: un dossier se prépare depuis quelque temps, il sera peut-être prêt un jour.

o o o

Terminons provisoirement sur ces lignes sévères de chrétiens bretonnants:

"Le monde breton est un monde non reconnu par l'Eglise au point que beaucoup de militants bretons se demandent si c'est consciemment que l'Eglise en Bretagne participe au déracinement culturel des Bretons...

Si le mouvement breton jeune dans son ensemble n'espère plus grand chose de l'Eglise, parce qu'à leurs yeux l'Eglise a renié la cause bretonne, les chrétiens du mouvement breton attendent beaucoup de l'Eglise, particulièrement au double plan de la compréhension et de la réflexion:

- 1 - Que l'Eglise prenne conscience d'un état de fait: l'évolution de la mentalité des jeunes vis-à-vis du problème culturel. S'il est indéniable qu'aujourd'hui le clergé commence à être plus attentif au problème économique breton, il reste clair qu'il continue à considérer comme retardés ou menant un combat d'arrière-garde tous ceux qui s'attachent au développement de la langue et de la culture bretonnes...
- 2 - Que quelques prêtres nous aident dans notre réflexion... Mais devant les refus trop souvent essayés, nous n'osons plus faire appel aux prêtres 'qui ont à s'occuper de choses plus sérieuses'."

J.F.

o o o

३३३

Kai

Abi

De 21

crd

)

2)

)

- 8 Digoret e-neus eun ero... E vignoned a zo en o sonj kenderhel gand al labour, heptan siwaz ! Diouer braz a vo anezan !

Eur follenn kavet war e vureo: "Keleier", bet skrivet gantan nebeud amzer araog e varo, a embannom aman warlerh evel eun testament. Fiziens on-eus a vo selaouet ar halvadenn boaniuz a gas da veleien ha da gristenien Breiz, galvadenn "ar re geiz euz a Vreiz" e-neus an Aotrou chaloni NEDELEC kemend karet.

+ *Visant FAVE*

Eskob skoazeller Kemper ha Leon

o o o

A benn ar zeiteg a viz Here e tigouezo ganeoh ar 16ed Kaier a vo ennan ar zulvezioù diweza, euz euz an 29ed sulvez beteg Gouel an Aotrou Krist Roue.

K. ar B.

KAIEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG - ESKOPTI KEMPER HA LEON

o o o

KAIER XVI

o o o

Cahiers non périodiques - Souscription: 10,00 f.

C.C.P.: 1738 66 - RENNES - Abbé Joseph SEITE - 29 N GUISSÉNY.

30ed sul ordinal (Bloavez "C").....	p. 9
31ed sul ordinal (Bloavez "C").....	13
32ed sul ordinal (Bloavez "C").....	19
33ed sul ordinal (Bloavez "C").....	25
34ed sul ordinal - GOUEL AN AOTROU KRIST ROUE (Bloavez "C").....	29

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. BARBU, Eskob Kemper ha Leon

Kemper, d'an 15 a viz here

+ V. FAVE, Eskob-skoazeller.

o o o

LENNADEN GENTA: Pedenn an den paour hag izel a galon a vez selaouet gand Doue.

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ GAND AB-SIRAH (Sir. 35/12-14, 16-18)

- 12 An Aotrou Doue a zo anezañ eurbarnet ha ne ra ket a gemm etre an dud.
13 Koulz deuet eo dezañ ar paour ha selaou a ra pedenn an den gwasket.
14 Ne jom ket dizeblant ouz pedenn an emzivad, nag ouz ar glemmadenn a gas
hag a zigas beteg ennañ an intañvez.
16 An neb a zervij Doue a-greiz e galon a zo digemeret mad, hag e bedenn a ya
beteg an neñv.
17 Ar paour a dreuz e bedenn an neñvou, ha ken na vez eet da benn, n'eus
frealzidigez ebed evitan.
18 Ne baouez tamm, ken n'e-neus an Doue-Uhel-Meurbed taolet e zaoulagad
warnañ, barnet a-du gand an dud just ha rentet ar justis.

SALM 33: 2-3, 10-11, 12-13, 14-15)

Diskan (ton: Kantik ar baradoz)

TANVAIT HA GWELIT
PEGEN MAD EO DOUE,
EURUZ, EURUZ AN DEN
E-NEG FIZIANS ENNAÑ

2 Me 'lavarao bennoz da Zoue e peb amzer, e veuleudi bepred war va muzellou.

3 En Aotrou e lakan va enor; ouz va hleved, ra vo laouen an dud fidel.

10 Bevit e doujans Doue, c'hwi tud fidel dezañ, n'eus ket a zienez evid neb a zonz anezañ.

11 Ha pa ve gwasket tud pinvidig gand dienez ha naon, ar re a glask beza tost d'an Aotrou ne vank netra d'ezo.

12 Deuit, bugale, d'am zelaou: doujans an Aotrou a zeskin deoh.

13 Piou eo an den e-neus c'hoant da veva, ha da ren deiziou eüruz ?

14 Diwallit ho teod diouz an droug hag ho muzellou diouz ar gaou.

15 Tehit diouz an droug ha grit ar pezh 'zo mad, klaskit ar peoh ha poanit d'e vired.

*EIL LENNADENN: An abostol Sant Paol, prizoniet e Rom, pell a goll kalon,
a ziskeir e fizians e Doue.*

PENNAD EUZ EIL LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA DIMOTE (4/6-8, 16-18)

6 Va mab karet, me 'zo dija kinniget va buez 'e sâkrifis, hag erru eo ar houlz d'in da guitaad.

7 Stourmet am-eus ar stourmad kaer, eet da benn va redadenn, chomet on stard er feiz.

8 Ne jom ken ganen nemed reseo kurunenn ar zent;
gand an Atrou Krist, ar barner just, e vo roet din da geñver an deiz-se, ha n'eo ket din-me hebken, med da gemend hini a gar anezañ hag e-eus mall

d'e wejed en e hloar.

16 Dirag al lezvarn, en dro genta, n'eus bet den em hichen ; dilezet oun bet gand an oll.

17 An Aotrou, eñ, a zo bet ouz va harpa hag e-neus roet nerz din, evid ma hellin, beteg penn, prezeg an aviel hag e rei da gleved d'an oll bayaned, ha tennet on bet ouz geol (pe: genou) al leon.

18 An Aotrou a denno ahanon dibistig euz peb taol fall hag am zaveteo da vond en e rouantelez en Neñvou. D'ezan peb gloar da virviken. Amen.

Salud d'an Aviel. Alleluia - Alleluia.

Meuleudi deoh, Doue on Tad,
mestr an Neñv hag an douar,
D'ar vugaligou ho peus roet da anaoud
misteriou ho Rouantelez- Alleluia.

Pennad euz avi Jezuz-Krist hervez Sant Lukaz (18/9-14)

9 En Amzer-ze, e lavaras Jezuz eur barabolenn evid ar re a grede dezo e oant just ha n'o-doa nemed disprij evid an dud all.

10 Daou zen a bignas d'an templ da bedi ; unan anezo a oa eur Farizian, egile eur Publikan.

11 Ar Farizian, en e zav, a bede ennañ e unan evel-henn : "Va Doue, ho trugarekaad a ran, en abeg n'on ket egiz ar re all : laër, disleal, avoultrer, pe c'hoaz evel ar publikan-mañ.

12bis

30ed SUL ORDINAL (bloavez "C")

PEDENN AN DLGOR

Pedom ! Doue oll-halloudeg ha peurbadel, kreskit ennom ar feiz, an espe-
rañs hag ar garantez; hag evit ma hellim kaoud ar pezh a brometit,
grit deom kaoud evidoh karantez awalh evit heulia a-zevri ho kourhemennou.

Dre or Zalver Jezuz-Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha gand
ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROFOU

Plijit ganeoh, Aotrou Doue, taoler eur zell a vadelez war ar provou a ginn-
igom deoh amañ; ar sakrifis lidet ganeom, ho servicherien,
ra dalvezo dreist peb tra, evid enor ho kloar.

Dre Jezuz-Krist, or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a unan ! Emaom o pedi c'hoaz, Aotrou Doue,
ra labouro ennom, hed or buaer,
vertuz an overenn hag ar gomunion; ar pezh a lidom bremañ, dindan spesou ar
zakramant, grit ma welim anezañ, eun deiz, dizolo, e splannder an Neñv.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

- I2 - Yun a ran diou wech ar sizun ha rei a ran ive an degved euz ke --
ment a hounezan."
- I3 - Ar Publikan avad a en em zalhe e traoñ an templ, ne grede ket zoken
sevel e zaoulagad etrezeg an neñv ha skei a rea war boull e galon,
en ur lavared:
" Doue, ho pet truez ouzin, peher ma z'on."
- I4 - Me lavar deoh, hemañ a ziskennas d'e di, pardonet gant Doue, met na-
egile, rag an neb en em uhela a vo izelaet hag an neb en em izela
a vo uhelaet.

+++++

LENNADEN GENTA: Doue a gar e oll grouadurien hag a zo mad evito.

PENNAD EUZ LEVR AR FURNEZ (11/23-26, 2/1-2)

- 23 - Aotrou, truez ho-peus ouz an oll, o veza ma n'eus netra dreist ho kalloud.
Serri a rit ho taoulagad war behejou an dud, evid ma teuint da drei kein
d'an droug.
- 24 - Kared a rit kemend a zo ha n'ho peus ket a gasoni ouz hini ebed euz ho
krouadurien m'ho pefe bet kasori ouz tra pe dra, n'ho pefe ket e grouet.
- 25 - Penaos e hellfe eun dra beza anezañ nemed ha fellet e vefe bet deoh ?
Penaos e hellfe chom da veza nemed ha galvet e vefe bet ganeoh ?
- 26 - Med damanti a rit d'an oll draou, rag ma'z'int oll deoh, C'hwi, Mestr,
hag a blij deoh ar vuhez.
- 2/1 Ho Spered, ha n'hell ket mervel, a zo en oll draou.
- 2 Ar re a gouez, C'hwi a glask o zevel a-nebeudou. Diskouez a rit dezo e
peleh ema o fehed, evid ma teuint da drei kein d'an droug ha da gaoud feiz
ennoh, Aotrou Doue.

Salm - 144/1-2, 8-9, 10-11, 13-14

Diskan : (ton : meulom oll...)

Kanom oll, da viken,
meuleudi da Vestr ar bed.

- 1 - Ho meuli a fell din, va Doue, O Roue, ha benniga hoh ano da viken.
- 2 - Kana meuleudi deoh bemdez, meuleudi d'hoh ano da viken.
- 8 - Truezuz ha trugarezuz eo an Aotrou, difonn da vond e konnar ha leun a vadelez.
- 9 - Mad eo an Aotrou e-kenver an oll, ha trugarezuz evid e oll grouadurien.
- 10 - C'hwi vo meulet, Aotrou, gand an oll grouadurien, hag ho tud fidel ho pennigo.
- 11 - Displega' raint gloar ho rouantelez, skigna' raint brud ho kalloud.
- 13 - Gwirion eo an Aotrou en e gomzou, karantezuz en e oll oberou, harpa a ra an Aotrou ar re a gouez, ha lakaad eeun ar re grommet.

Eil lennadenn. Eun dervez a zeuio e vezim gand Doue ; da hortoz, kemerom perz e labour an Aotrou Krist.

PENNAD EUZ EIL LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN TESSALONIG

(II Tess. 1:11-12 ; 2/2)

- 11 - Va breudeur, pedi a reom Doue evidoh heb éhan,

14

Evid ma plijo gantañ renta ahanoh din
euz ar galvet m'oh bet gantañ,
ha ma ray galloud deoh da gas da benn
ar vad ho-peus c'hoant da ober
ha ma vo beo ho feiz.

- 12 - Evel-se e teuio gloar da Zoue diwarnoh
ha deoh diwarnañ

Dre hras on Doue hag or Zalver Jezuz-Krist

- 2/21 Va breudeur, goulenn a ran eun dra diganeoh :

evid ar pez a zell ouz donedigez an Aotrou Jezuz-Krist
hag ouz an unanet ma vezim gantañ

2. Na lezit ket re vuan ho spered da veza strafuillet nag enkrezet
gand an disklêriadennou lakeet war gont ar Spered
pe c'hoaz komzou pe skridou lakeet war va hont
hag a rofe da gredi e vefe tost deiz an Aotrou.

SAIUD D'AN AVIEL. ALLELUIA. ALLELUIA.

Bremañ e roan deoh an ano a vignon

Rag kemend am-eus klevet gand va Zad

am-euz roet deoh da anaoud.

15

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ-KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (19/1-10)

1. Jezuz, antreet e Jeriko, a oa o treuzi kêr.
2. Bez'e oa eno eun den anvet Zache
unan euz pennou-braz ar Bublikaned
eun den pinvidig anezañ.
3. o klask gweled piou e oa Jezuz ;
Med, ne zeue ket a-benn, ablamour d'an engroez a dud
rag bihan e oa a vent.
4. Neuze e redas en araog hag e pignas en eur wezenn sikômor, evid e weled,
rag dre eno e illee tremen.
5. Jezuz, pa erruas el leh-se, a zavas e zaoulagad hag a lavaras dezañ :
-"Zache, hast buan diskenn, rag en da di e rankan hirio mond da loja.
8. Med Zache a yeas dirag an Aotrou hag a lavaras :-" Sellit, Aotrou, an
hanter euz va madou a roan d'ar beorien ha ma'm'eus greet gaou ouz unan
pe unan, e rentan d'ezañ peder gwech kemend-all.
9. Neuze e lavaras Jezuz dezañ :
-"Hirio eo deuet ar zilvidigez evid an ti-mañ, hemañ ivez a zo eur mab da
Abraham".
10. Rag mab an den a zo deuet da glask ha da zavetei ar pezh a oa kollet.

16

Pedenn an digor : Pedom Doue... Doue oll-halloudeg ha leun a drugarez,
dre ho kras eo e hell ho tud fidel ho servicha ervad;
grit deom eta kerzed founnuz, heb koeza morse,
war an hent a gas d'an eürusted ho peus prometet. Dre O.Z.J.K...

War ar provou. : Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma vo ar zakrifis-mañ
eur brovadenn divlam évidoh,
hag evidom eur vammenn a hrasou diwar ho madelez. Dre J.K.or Z.

Goude ar gomunion : Ni ho ped, Aotrou Doue, da greski ennom

labour ho kras evid santellaad or buez ;
maget er zakramant gand ar bara euz an neñv,
ra vim lakeet muioh-mui e stad da hounid an eürusted
on eus ennañ ar bromesa hag an tañva.

Dre Jezuz Krist, or Zalver.- Amen.

o o o

17

Lennadenn ganta : An den just ne day ket da goll. Kennerzet gand an esperans da adsevel beo evid eur vuez peurbaduz, goude o maro, paotred yaouank yuzeo a gav gwelloc'h mervel eged trei kein d'o feiz.

PENNAD EUZ EIL LEVR AR MAKABEED. (7/1-2, 9-14)

1 - En deiziou-ze, e tiguezas da zeiz breur ha d'o mamm beza paket.

Ar roue Antiokuz, a daoliou fouet hag a dalliou skourjez, a glaskas o lakaad da zibri kig-moh, ar pez a oa divennet gand al lezenn.

2 - Unan anezo a zisklerias, en ano an oll :

- "Petra' houlennet ha Petra' glaskez gouzoud diganeom ? Prest oun da vervel kentoc'h eged terri lezenn on Tadou".

9 - An eil, p'edo warnez mervel a lavaras :

- "Te, den fallakr a zo ahanout, te a lamm diganeom buez ar bed-mañ ; med, Roue ar bed on dazorho (pe : on adsavo da veo), evid chom fidel d'e lezen-nou".

10 - Goudeze e oa boureviet an trede.

Hemañ, kerkent ha ma oa graet goulennou outañ, a dennas e deod hag a astennas e zaouarn heb aon.

11 - Diskleria a reas kaloneg :

- "An izili-mañ am-eus bet euz an neñv, med, ablamour da lezenn Doue, e ran bremañ fae warno. Digand Doue eo am-eus fiziand d'o adkavoud en dro."

12 - Ar Roue e-unan hag ar re a oa gantañ a oe estlammet dirag nerz-kalon ar paotr-yaouank-se, a lakee e renk netra e boaniou kaled.

13 - Hemañ maro, e oe boureviet ar pevare er mamez de e.

14 - Dare da vervel, e lavaras :

- "Kaer eo mervel dre zaouarn an dud, pa vez esperañs; aberz Doue, da veza dazorhet (pe : adsavet da veo) gantañ, mes te, ne vo evidout adsao ebed d'arvez."

Sa n 16/1, 5-6, 8^b; 15.

Diskan : Aotrou Doue : Va gwalh pa zihumin, en da skeudenn a gavin.

1 - Va zelaouit, Aotrou, pa houlennan justis, klevit va hlemmadenn ;

Taulit evez ouz va fedenn,

Ne zeu ket diwar muzellou gaouiad.

5 - Kerzet am-eus war ho reoudou, ha n'e-neus ket va zroad asoupet.

6 - Ho kervel a ran, rag c'hwi am zelaou, o Doue, troit ho skouarn warzu ennon, selaouit va fedenn.

8 - Va diwallit zvel mab ho lagad, e skeud hoh eskell, deuit d'am huzed, ha me rentet just, a arvesto ouz ho tremm, ha va gwal, pa zihumin, en ho skeudenn, a gavin.

Eil lennadenn: Bezom stard en or feiz, heuliom Jezuz-krist, heb marhata ; eun dervez on-devo perz en e levenez peurbaduz. 21

PENNAD EUZ EIL LIZER S^t PAOL DA GRISTENIEN TESSALONIK. 2/16, 3/5.

2/16 Va breudeur, plijet gand an Aotrou Jezuz-Krist e unan, ha gand Doue an tad e-neus or haret, hag e-neus roet deom dre vadelez frealz peurbaduz hag esperañs 'hweg, frealzi ho kalonou hag o startaad e kemend mad dre ober pe dre gomz.

3/1 A-hend-all, va breudeur, pedit evidom, ma'z'ay komz aviel an Aotrou atao pelloh, ha ma vo rentet gloar dezi zvel ma vez greet en ho touez.

2 Goulennit ma vezim distrobet diouz an dud diboell ha fallakr, rag n'eo ket roet d'an oll kaoud feiz.

3 Fidel eo an Aotrou, Nerz a roio deoh hag ho tiwall a ray diouz an Droug-spered.

4 Evid ar pez a zell ouzoh, on'eus fizians ennoh, en Aotrou, e rit hag e kendalhoh da ober ar pez a hourhemennan deoh.

5 Plijet gand an Aotrou ren ho kalonou warzu karantez Doue, Hag an nerz da houzañv a gavom en Aotrou Krist.

SALUD D AN AVIEL. Alleluia, alleluia.

me a zo sklerijenn ar bed,

an neb a zeu d'am heul e-no sklerijenn ar vuhez.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ-KRIST HERVEZ SAINT-LUKAZ (20/27-38).

- 27 - Lod Saduseane, euz ar re-ze hag a lavar n'eus dazorh (pe : adsao) ebed evid ar horvou, a houlennas ouz Jezuz :
- 28 - Mestr, Moizez e'neus roet deom al lezenn-mañ : ma teu unan bennag da vervel heb lezel bugale, hag eñ dimezet, e tle e vreur dimezi d'an intañvez da zavel ligned d'an hini maro.
- 29 - Ha setu ma oa seiz breur :
- ar henta a zimezas hag a varvas heb lezel bugale.
- 30 - An eil a gemeras an intañvez hag a varvas ivez heb lezel bugale.
- 31 - An trede hag ar re all a c'hoarvezas ganto kemend-all.
- 32 - A-benn ar fin e varvas ivez ar wreg.
- 33 - Ahanta ! da vare an dazorh (pe : an adsao) da bioue vo gwreg ar vaouez-se ? rag o zeiz o-dezo bet a ezi da bried.
- 34 - Jezuz a respontas d'ezo :
- Er bed-mañ an dud a gemer pried hag a vez roet da bried.
- 35 - Med, ar re a vo kavet din da gaoud perz er bed all hag en dazorh a douez ar re varo, ne gemerint na gwaz na gwreg.

- 36 - Rag n'hellont ket mervel, o veza ma'z int heñvel ouz an êlez ha ma'z'int bugale da Roue, peogwir o-deus perz en dazorh (pe : adsao) d'ar vuhez.
- 37 - Hag eh adsavo ar re varo da veo, Moizez e-unañ e-neus henn roet deom da houzoud, er pennad a gont ar brouz-koad o tevi, pa anv an Aotrou : Doue Abraham, Doue Izaag ha Doue Jakob.
- 38 - Ha n'eo Ket Doue an dud varo eo, med Doue an dud veo, rag evitañ, ez int oll beo.

PEDENN AR DIGOR .- Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha leun a drugarez,
pellait diouzom, ni ho ped, kement a vefe a-dreuz d'on hent,
evid ma vim distrob a gorr hag a spered
hag e stad d'ober a galon vad ho polontez santel.

Dre Or Zalver Jezuz-Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh
ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.-R/ Amen.

(Ar gempedenn-se a oa d'an 19ved sul goude ar Pantekost)

WAR AR PROVOU.-

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, taoler eur zell a vadelez war ar provou-mañ :
pa'z eom da ginnig ar zakrifis gand ar zonz eus Pasion ho Mab,
grit ma kemerim perz ennañ gand oll nerz or halon.

Er Jezuz-Krist, or Zalver.- R/Amen.

GOUDE AR GOMUNION.-

Ho trugarekaad a reom, Aotrou Doue,
bremañ p'om bet maget gand ho tonezon zantel ;
ha setu e pedom c'hoaz ho madelez :

war an dud a zo silet enno eun nerz nevez guz an neñv (dre ar gomunion),
skuillit ho Spered dantel, evid ma talhint da veva e stad a hras.

Dre Jezuz-Krist, or Zalver.- R/. Amen.

*LENNADENN GENTA: Heñvel ouz eun heol, deiz bras an Aotrou a vo eur
skerijenn evid an dud just, med ivez eun tan hag a
zistruj evid ar re o-do troet kein dezan.*

PENNAD EUZ LEVR AR PROFED MALAKIAZ (4/1-2, pe Hebr. 3/19-20a)

- 1 Setu an deiz o tond, tomm evel eur forn (horet); plouz ne vezint ken an dud otuz
ha fallakr. An deiz a zo o tond a bulluho anezo, eme an Aotrou, ken na lezo ganto
na gwrizienn na skour.
- 2 C'hwi avad hag a zo doujuz d'am ano, a skedo evidoh heol ar justis, gand ar
zilvidigez en e vannou.

SALM 97 (5,6,7,8,9)

DISKAN: Dond a ray an Aotrou
da varn ar bed gand lealded.

- 5 Sonit d'an Aotrou war an delenn, war an delenn ha gand son ar muzikou.
- 6 Gand trompill ha son ar horn-boud, kanit meuleudi d'ar Roue, on Aotrou.
- 7 D'ar mor krozal gand kemend 'zo ennân,
d'ar bed kana meuleudi gand kemend zo ennân,
d'ar steriou mouskana o ruill o douriou,
d'ar menezioù rei da gleved o levenez.

8 Dirag an Aotrou, rag o tond ema, o tond ema da ren an douar,
ren a ray ar bed gand justis, hag ar poblou gand lealded.

*EIL LENNADENN: Lezom Doue hag an Aotrou Krist da varn or buhez, poaniom da astenn
rouantelez Doue.*

PENNAD EUZ EIL LIZER SANT PAOL DA GRISTENIEN TESSALONIK (3/7-12)

- 7 Va breudeur, gouzoud a rit ervad petra da ober evid kerzed war or roudou. N'on
ket chomet da ober va feneant en ho touez.
- 8 N'eo ket diwar an aluzenn on-eus debret or bara, med noz-deiz edom war ol labour,
er boan hag er skuizder, evid mired da veza eur zamm evid nikun ahanoh.
- 9 N'eo ket avad n'on-defe ket droad d'henn ober, med felloud a ree deom beza evidoh
eur skouer da heulia.
- 10 Ha neuze, p'edom o chom ganeoh, e roem deoh ar reolenn-mân: an neb ne fell ket
dezân labourad, ne dle ket dibri kenneubeud.
- 11 Klevet a reom koulskoude ez 'eus en ho touez tud hag a vev er feneantiz, ne reont
taol labour ebed, ha prez warno dalhmad.
- 12 Pedi a reom ar re-ze hag o alia stard, en ano an Aotrou Jezuz Krist, da
labourad er peoh evid debri eur bara gonezet ganto.

SALUD D'AN AVIEL:

Alleluia ! Alleluia !
Beillit ha bezit aketuz da bedi e peb amzer,
evid beza er stad d'en em gaoud dirag Mab-an-den

PENNAD EUZ AN AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (21/5-12)

- 5 Lod, diskibien da Jezuz, a oa o tivizoud diwarbenn an templ, bamet ha souezet
o weled ar vein gaer ha provou an dud fidel. Jezuz a lavaras d'ezo:
- 6 An traou-ze oll emaozh oh arvesti outo, eun deiz a zeuio ha ne jomo ket anezo
maen war waen, distrujet e vo peb tra.
- 7 Goulenn a rejont outân: Mestr, peur e tigouezo kemend-se ? ha petra vo ar zin
ema war-nez erruout ?
- 8 Respont a reas: Diwallit na vefeh touellet, rag kalz a zeuio em hano hag a lavaro:
me eo ! ha: tost braz ema an amzer ! N'it ket d'o heul !
- 9 Pa glevoh kont euz brezelioù, taolioù dispah, n'it ket da sponta ! Kement-se a
rank erruoud da genta, med ne vo ket fin ken buan all.
- 10 Jezuz a lavaras c'hoaz: Freuz a zavo: broad eneb broad, rouantelez eneb
rouantelez.
- 11 Meur a gren-douar braz a vo e meur a leh, bosenn ha kernez amân hag haont, en
oabl e vo gwelet traou spontus ha sinou braz.
- 12 Med araog an oll draou-se e vezoh paket ha gwall gaset, roet e vezoh d'ar
sinagogou, lakeet er prizonioù, kaset dirag ar rouaned hag ar houarnerien, en
abeg d'am hano.
- 13 Ha kemend-se a roio tro deoh da rei testeni. (pe: da lavared ar pezh ho peus
gwelet ha klevet).

14 Lakit mad en ho spered n'ho po ket da glask penaoz en em zivenn.

15 me va unam a zilo en ho spered komzou ha furnez ha n'hell ket hoh enebou-
rien herzel outo nag o dispenn.

16 Gwerzet e vezoh gand ho tad hag o mamm zoken, gand ho preudeur, ho tud nez
(pe : tud kar) hag ho mignoned, lod ahanch a vo laket d'ar maro ganto.

17 Kas o-devo an oll ouzoh ablamour d'am ano.

18 Med blevenn ebed diwar ho penn na vo kollet.

19 Dalhit mad d'ho feiz hag e vezoh salvet.

PEDENN AN DIGOR.- Grit deom, ni ho ped, Aotrou Doue, beza laouen bepred
ouz ho servicha a wir galon,
pegwir n'eus na kaerroh na padusoh eürusted evidim
eged servicha dalhmad Krouer an oll vadou. Dre O.Z.J.K.
WAR AR PROVOU.- Plijet ganeoh, Aotrou Doue, selled ouz ar provou-mañ
kinniget d'ho kloar, evid ma teüio deom, dre ar zakrifis santel,
ar hras da jom fidel deoh, ha da houmid an eürusted peurbaduz. Dre...

GOUDE AR GOMUNION.-
resevet ganeom magadur ar vuez peurbaduz,
ni ho ped gand fizians, Aotrou Doue :
ni hag a zo eun enor evidom senti da lezenn an Aotrou Krist,
Roue ar bed a-bez,
ra vim gantañ e rouantelez ar baradoz
beo hag eüruz da viken.
Drezañ, Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen,

o o o

←
eleh ar BEDENN GOUDE AR GOMUNION, evit an 33 ved sulvez, a zo lakaet
e traiñ ar bajenn 28, kemered houmañ:

PEDENN GOUDE AR GOMUNION

Pedom oll a unan ! Resevet on eus, Aotrou Doue, Sakramant an Aoter,
ha bremañ ho pedom a greiz kalon:
ar pez on eus grêt en overenn gant ar soñj eus ho Mab,
evel m'e-noa lavaret henn ober,
ra dalvezo da lakaad or harantez da greski. Dre J.K. or Zalver. AMEN !

34ed SUL ORDINAL - GOUEL AN AOTROU KRIST ROUE (Bloavez "C")

LENNADENN GENTA: David, ar mesaer yaouank euz Betleem, an disterra euz mibien Izaï, a zo lakeet da roue, warlerh Saül. Eñ eo a zo dibabet gand Doue da labourad gantañ evid silvidigez e bobl. Eur skeudenn eo euz Jezuz Krist.

PENNAD EUZ EIL LEVR AR PROFED SAMUEL (5/1-3)

- 1 En deiziou-se e teuas oll veuriadiou Israël da gaoud David e kêr Hebron, hag e lavarjont dezañ: "Sell ! Bez 'ez 'euz da gig hag euz da eskern.
- 2 Gwechall dija, p'edo Saül o ren warnom, te eo a gase hag^azigase Israël, hag e-na lavaret dit an Aotrou ! Te a vo pastor va fobl Israël ha te a vezo penn-rener Israël."
- 3 Oll re-goz Israël (pe: oll gozidi-meur Israël) a zeuas ivez daved ar roue e kêr Hebron. Ar roue David a reas emgleo ganto e Hebron, dirag Doue hag int-i a oleas David (pe: a zakras David gand eol) da roue war Israël.

SALM 121 (1-2, 3-4a, 4b-5)

DISKAN: Stad a oa ennon pa 'z 'eus bet lavaret d'in: Deom da di an Aotrou Doue.

pe: Enor ha gloar da Vab Doue, ne fell deom kaoud mestr na roue, nemed Jezuz pad or buez.

- 1 Stad a oa ennon pa 'zeus bet lavaret din: Deom da di an Aotrou Doue.
- 2 Ha setu ni chomet a zav, dirag da zoriou, Jerusalem.
- 3 Jerusalem, savet evel eur gêr, unanet stard enni an tiez, di e pign ar meuriadou
- 4 Meuriadou an Aotrou Doue.

- 4^b Evid meuli, hervez lezenn Israël, ano an Aotrou Doue.
 5 Rag eno eo bet savet troniou al lezvarn, troniou Rouantelez David.

*EIL LENNADENN : Jezuz-Krist, dre e zentidigez da Zoue e dad, e'neus gonezet
 ar vuez peurbaduz evid ar re oll a yelo d'e heul.*

PENNAD EUZ LIZER Saint Paol da gristenien kôlos 1/12-20.

- 12 Va breudeur, trugarekait Doue an Tad e-neus lakeet ahanoh gouest da gaoud
 perz e lod ar zent er sklerijenn.
 13 On tennet e-neus euz galloud an droug-^spered ha greet deom antreal e rouan-
 telez e Vab karet.
 14 On-eus ennañ an daspren hag ar pardon euz or pehejou.
 15 Bez'ez eo Jezuz-Krist ar skeudenn euz an Doue na weler ket, kenta ganet euz
 an oll grouadurien.
 16 Ennañ eo bet krouet peb tra, en neñv ha war an douar, an traou a weler hag
 an traou na weler ket. Drezañ hag evitañ eo bet krouet peb tra.
 17 Eñ a zo anezañ araog peb tra all, hag ennañ eo e kendalh peb tra da veza.
 18 Eñ eo ivez ar penn euz ar horv, da lavared eo, euz an iliz. Eñ eo ar Penn-
 kenta, an Hini-kenta, savet a-douez ar re varo ; evid ma talhfe, e peb tra,
 ar renk kenta.
 19 Rag, plijet eo gand Doue lakaad da jom ennañ, en e gaer, kemend a hell beza.
 20 Fellet eo gantañ unani anezañ hag evitañ an oll draou war an douar hag en
 neñv, en eur ober ar peoh dre ar gwad euz e groaz.

SALUD D'AN AVIEL: Alleluia ! Alleluia !
 Benniget ar rouantelez o tond,
 Hini David, on tad,
 Hozanna e bar an neñvou ! Alleluia !

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (23/35-43)

- (P'edo Jezuz stag ouz ar groaz)
 35 Ar bobl a jome eno da zelled, ar pennou braz a ree goap ouz Jezuz:
 "Saveteet e-neus ar re-all, emezo, dezañ en em zavetei e-nunan, mar deo
 meziaz Doue, en hini dibabet gand Doue !"
 36 Ar zoudarded ivez a ree goap anezañ, tostaad a reent ha kinnig gwinegr dezañ
 37 "Mar dout Roue ar Yuzevien, en em zavete da unan".
 38 Bez'e oa ivez eur skritell a-uz d'e benn, merket warni : "Roue ar Yuzevien eo
 hemañ".
 39 Unan euz an dorfetourien stag ouz ar groaz a lavare komzou divalo dezañ :
 "Ha n'eo ket te eo ar mesiaz ? En em zavete da unan'ta ha ni ganez !"
 40 Egile avad en em zavas outañ hag a lavaras : "N'az-peus ket eta aon ebed'rag
 Doue ? te hag a zo kondaonet d'ar memez kastiz".
 41 "Evidom-ni n'eo nemed justis ; ne vez greet deom nemed ar pezh on'eus meritet,
 med hemañ n'e-neus greet droug ebed".

42 Hag e lavare:

"Jezuz, bez sonj ahanon pa vezi erruet en da rouantelez".

43 Respont a reas Jezuz :

"E gwirionez, m'hel lavar dit, hirio e vezi ganen em rouantelez.

PEDENN AN DIGOR. -

Doue all-alloudeg ha peurbadel, en ho Mab karet, Roue ar bed a-bez
eo fellet deoh adsevel hag unani an oll draou krouet;
plijet ganeoh eta, ma vo an oll grouadurien,
distag drezañ euz liammou peb sklaverez,
douget d'ho servicha laouen ha d'ho meuli da viken.
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, Doue beo ganeoh ha...

WAR AR PROVOU. - En eur ginig deoh amañ, Aotrou Doue,

ar zakrifis a laka gouenn an dud da gaoud adarre ho peoh,
e-houlennom gand doujans ma roio ho Mab e-unan d'an oll boblou
ar hras da veza unanet ha da gaoud ar peoh kenetrezo.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/ Amen.

(Prefas an Aotrou Krist Roue, levr-Overenn aoter, p. 48)

GOUDE AR GOMUNION. - Resevet ganeom magadur ar vuez peurbaduz,

ni ho ped gand fizians, Aotrou Doue :

Ni hag a zo eun enor evidom senti da lezenn an Aotrou Krist, Roue ar bed a-bez,
ra vim gantañ e rouantelez ar baradoz

beo hag eüruz da viken.

Drezañ. Jezuz-Krist, or Zalver. - R/ Amen.